


HEKLEV SEVENADUREL

	A-dreuz lenn	2
	Petra nevez ?	6
	Kelaouennoù	14
	Notennoù	22

Herve LATIMIER

The Lord of the Rings,
gant J. R. R. Tolkien,
Harper Collins
Publishers, 1995,
1148 pajenn, £14,99



War golo al levr e lenner :
« *The English-speaking world
is divided into those who have
read The Lord of the Rings and
The Hobbit and those those
who are going to read them* ».
Seblantout a ra mont un tamm
pell ganti met soñjal a ra din n'eo
ket diwir penn-da-benn. Evel
lenner levrioù saoznek ec'h on
bet pell en eil rummad. Ur wech

lennet *The Lord of the Rings*
e tlean lavarout ez eo, d'am
meno, ur gwir bennoberenn.
Kompren a reer e levezon
divent er bed saozneger. Gellout
a reer kavout hirik prantadoù zo
rak lusk un deizlevr en deus al
levr. Koulskoude, ken resis eo
an deskrivadurioù, ken niverus
an darvoudoù ha taolennet
ken mat santadoù an tudennoù

liesseurt ken e vezer broudet da vont war-raok bepred. Anavezet mat eo istor Frodo Baggins hag ar Walenn a Veli (*The Ruling Ring*) a-drugarez d'ar filmoù o deus graet berzh er bed a-bezh. Dibosupl e vefe klask reiñ un diverrañ eus un istor ken pinvidik na zoken klask ober ur roll eus an tudennoù pouezusañ, ken niverus ha ken disheñvel. Deuet eo a-benn Tolkien da grouiñ ur bed en e bezh. Pinvidik-tre eo ar yezh ha klasket en deus an aozer reiñ un arliv ispisial dezhi evit klotañ gant ar bed-se. N'eo ket bepred eus an aesañ, hep bezañ ur skoilh avat.

E dibenn al levr (adalek ar bajenn 1009) e kaver stagadennoù puilh o tisplegañ istor ar

pobloù a gaver el levr hag o yezhoù. Kartennoù evit lec'hiañ an darvoudoù a gaver ivez.

Kompren a reer e adlennfe tud zo al levr meur a wech o kavout bep tro traoù n'o doa ket gwelet. N'ouzon ket hag-eñ e rin kemend-all met broudañ a ran hol lennerien da lenn anezhañ ur wech da nebeutañ.

Poent bras 'vo din memestra lenn *The Hobbit*... Arabat ankouaat eo bet troet e brezhoneg gant Alan Dipode (ARDA embanner, 2001). War roll an troidigezhioù a c'hellfe bezañ sikouret gant ar C'huzul Rannvro emañ *The Lord of the Rings*... Ha kavet 'vo unan evit sammañ seurt labour ?

La déconomie,
gant Jacques Généreux,
Le Seuil, 2016,
410 pajenn, 10€



Meneget ez eus bet daou levr gant Jacques Généreux el *Liamm* c'hoazh (*so* AL niv 266 ha niv 412). Kelenner ekonomiezh

e Skol ar Skiantoù politikel Pariz eo. N'eo ket ezel eus ar skourr a ren bremañ war an ekonomiezh, anat deoc'h. Evitañ


n'eo "azeulerien ar marc'had" nemet un doare sekteñ dallet gant o ideologiezh hep hentenn skiantel. O zeoriennoù heñvel ouzh re 1920 ha pell diouzh ar bed gwirion a levezon renerien ar bed o lakaat anezho da zont da vezañ diot daoust d'o speredegzh ha da zivizout traoù kontrol da vad an dud ha d'ar skiant-vat. Displegañ a ra e soñj war an danvez-se hag e arguzennoù adalek ar chabistr 5 (*Génèse de la décononomie politique ; retour aux sources des erreurs politiques et de leur antidote*) betek an diwezhañ chabistr (*Comprendre la bêtise des intelligents / Biais cognitifs, obscurantisme et sectarisme*). Etre an daou e kaver un varnadenn sklaer eus ar politikerezhioù renet abaoe ar bloavezhioù 1970-1980, un dielfennadur dedennus-kenañ eus stad Europa (Chabistr 7 : *La décononomie européenne, La mort programmée de l'Union européenne*). Er chabistr 8 (*La théorie de l'économie, L'étrange domination d'une science factice*) e lenner ur vurutelladenn kendrec'hus ha displeget en un doare pedagogel eus diazezoù teorikel ar "skiant" ekonomek "nevezglasel" pe "nevezfran-

kizour". Er pevar chabistr kentañ goude un termenadur eus an *décononomie* e c'heller lenn un daolenn eus saviad ar bed m'emaomp. Kentelius eo ar pemp rann warn-ugent diwarbenn petra eo e gwirionez ar bedelaat, an ekonomiezh a varc'had, ar "gapitalouriezh", an "embregerezh" peurgetket. A-zivout sorc'hennoù nann skiantel ekonomourien ar *main-stream*, doareoù kriz ha diboell doareoù an ekonomiezh a-vremañ, an hent (simpl...) da zont er-maez eus ar wikefre, ivez. Keynesian e tiskouez Jacques Généreux bezañ. Kalz eus an traoù a lavar a ya war memes tu ha dielfennadurioù Joseph E. Stiglitz (AL niv 425) ha labourioù Thomas Piketty (AL niv 421). Fent a gaver el levr, lodennoù tagus ivez, met sklaer eo an displegadennoù ha danvez preder e-leizh a zo. Ret eo e lenn gant ur spered burutellañ mennet met digor ha pozitivel evel ma c'houlenn er Chabistr 9 an aozer er rannoù a-zivout ar speredegzh hag an hentenn skiantek. Nec'het on bet gant e glozadur. Gwashaour eo : « *Sans cette transmission [hini ar poell hag ar sevenadur], nous ne sortirons jamais d'une*

histoire dans laquelle, jusqu'ici, il n'arrive pas qu'une société surmonte une impasse autrement que par le désastre ». Siwazh,

abegoù hon eus evit krediñ anezhañ... nemet e krogfemp da cheñch an traoù...

The Second Death, A Sister
Fidelma Mystery,
gant Peter Tremayne,
Headline, 2016,
338 pajenn, £8,99



26^{vet} levr o kontañ avanturioù Fidelma, c'hoar da Colgú, roue Muman hag he gwaz Brother Eadulf of Seaxmund's Ham eo *The Second Death*.

Kavet ez eus bet daou gelan en ur c'harr a heulie kirri arzourien war hent Foar Vras Bealtain e Cashel (kêr-benn rouantelezh Muman). Ampoezonet eo bet an daou zen. Eveljust ez eo fiziet an enklask e Fidelma hag Eadulf. Kaset e vezer da dachennoù geuniek Ostrage, da Cill Cainnech ha da veur a lec'h all. Kavout a reer war hon hent mister ur maen sakr evit Iwerzhoniz pa oant paganed c'hoazh hag ur gevreuriezh kuzh ha feuls (Ken-

vreuriezh ar Vran) a glask skarzhañ ar gristeniezh diouzh an Enezenn ha diskar aozadur politikel Iwerzhon.

Kalz darvoudoù, traoù kriz, an harozed lakaet en arvar meur a-wech, souezhadennoù hag ur varnedigezh er fin ma tispleg Fidelma pep tra...


Daoust din anavezout bed Fidelma, daoust din bezañ adkavet amañ ur framm istor un tamm heñvel ouzh reoù zo bet lennet c'hoazh em eus bet plijadur o lenn (buan) al levr. Un doare "fan" e tlean bezañ. Ur blijadur 'vo ober anaoudegezh gant Fidelma evit ar re n'he anavezont ket ha dont da vezañ "fan" d'o zro, marteze...

PETRA NEVEZ ?



**Herve LATIMIER &
Malo BOUESSEL du BOURG**

**An deiz a-raok an
eürusted,**
gant Erri de Luca,
brezhoneg gant Serj Richard,
Mouladurioù Hor Yezh,
160 Pajenn, 10€



Un iskis a levr eo *An deiz a-raok an eürusted*. E Napoli eo e reer anaoudegezh gant tudennoù Erri de Luca. Met buan e komprenet ez eus eus ar gêr-se pendudenn ar romant, hag andon e varzhoniezh. An tudennoù all, ur paotrig emzivad, ur plac'hig kevrinus, hag ar porzhier, un den mat anvet don Gaetano, n'int ken adskedoù Napoli. Bevañ a reont

en ur c'harter poblek ha paour. Deskiñ a ra ar paotrig penaos en em zibab gant skoazell e warezer, don Gaetano. Gantañ e tesko labourioù dorn a bep seurt ha penaos en em zifenn rak dañjerioù ar vuhez. Kontañ a raio don Gaetano istor Napoli d'ar paotrig, da vare ar brezel, pa oa bet argaset an Alamanted gant Napoliz o-unan ! Hag erfin e kaso anezhañ


etre divrec'h an intañvez e oa kustum d'ober ur weladennig dezhi ur wechig an amzer...

Pa oa yaouankik c'hoazh e oa bet boemet ar paotrig gant ar plac'hig a bare he selloù warnañ diouzh ur prenestr uhel, tra ma oa-eñ o c'hoari melldroad er porzh. Adkavet e vo gantañ pa vo erru paotr yaouank. Un iskis a vaouez eo deuet da vezañ. Sot-nay eo ganti. Met romant Erri de Luca n'eo ket ur romant eürus... Komzet em eus eus barzhoniezh avat, rak intret eo al levr gant un aergelc'h dibar ma vez mesket gwirliverezh hag arouezelezh, krizder ha denelouriezh, istor hag hunvreoù, saotr ha glanded, gwriziennoù hag harlu...

Trugarez da Serj Richard da vezañ roet da lenn en hor yezh unan eus ar skrivagnerien donezonetañ en Europa a-vremañ. Erri de Lucca a zo barzh, romantour ha troer. D'e c'hwezek vloaz e teuas da vezañ komunour. Treiñ a reas da anarkour goude bezañ lennet *Homage to Catalonia* gant Georges Orwell, ha nevesoc'hik zo e troas war-zu an arallbedelourien... Urstourmer ma 'z eus, hag un den kar ar yezhoù. Meskañ a ra italianeg ha napolitaneg en e skridoù. Hervezañ ez eo an italianeg « evel ur gwriad, un dilhad, war korf noazh ar rannyezh, ur rannyezh hag a zo en he butun gant an dichekadennoù ».

MBdB

**Istor fentus stadoù hag
impalaerezhioù
al loar,
gant Savinien Cyrano
de Bergerac,
brezhoneg gant Mich Beyer,
An Alarc'h embannadurioù,
114 pajenn, 10€**



Brudet eo bet tudenn Cyrano de Bergerac a-drugarez da bezh-c'hoari Edmond Rostand, met


nebeut a dud a oar ez eus bet eus Savinien Cyrano de Bergerac un den gwirion, kig hag eskern,

skrivagner eus e stad. Graet en doa berzh gant e bezhioù-c'hoari : *Le pèdant joué, la mort d'Agrippine...* Embannet e voe *Istor fentus stadoù hag impalaerezhioù al loar* e 1657, daou vloaz goude e varv. Ur seurt kontadenn faltaziek ha prederel eo, a zegas soñj eus *Gulliver's Travels*, *Les lettres persanes* pe *Candide*, met un tamm mat a-raok Swift, Montesquieu ha Voltaire. Ul levrig souezhus eo ken ez eo. Kontañ a ra gwalldroioù an aozer war al Loar, ur bedig-bed annezet gant estrenien. Un digarez da geñveriañ gant annezidi an Douar. Na pegen dichek an aozer ! Diskouez a ra bezañ dedennet gant ar skiantoù koulz ha gant ar brederouriezh. Un ijin hep e bar en deus. Rakwelour, barzh ha farser war ar memes tro. Ober a ra un deskriv eus ar c'hentañ selaouell-vale diouzh un tu, ha diouzh un tu all e klask sevel betek al loar o stagañ buredoù glizh ouzh e gorf... Displegañ a ra Cyrano de Bergerac e vennozhioù diwarbenn ar gevredigezh a veve enni. Mennozhioù gwall araokour, sur a-walc'h, rak troc'het e voe rannbennadoù hir en embannadurioù kentañ gant ar gontrol-

lerien ! Cyrano de Bergerac en doa lennet Descartes, moarvat, rak en e vleud emañ gant an arvariañ hentennek. Hag anavezout a rae labour Galilée kenkoulz all, pa laka ar gaoz war ar bed krouet, hag an doare ma kenc'hoari ar planedennoù etrezo. Ur spered digor hag hollouiziek e oa, prest d'ober goap atav, ha da atahinañ, pe da deurel ar brall war ar mennozhioù “prest-ha-tout”. Bezoud Doue, bevennoù ar bed, diazezoù ar vuhezegezh, an hevarv hag ar sekselezh... Dieub-kenañ e oa spered an azginivelezh, evit doare !

MBdB

**Kalonya ha skridoù
kuzh all,
gant Youenn Kervalan,
Embannadurioù Al Lanv
512 pajenn, 32€**



Kalonya... Ar pikol teskad testennoù-se zo chomet e-pad pell war va zaolig-noz. Bemdez e pigosen div pe deir barzhoneg a-raok menel kousket, evel ma teu e teu, a-dreuz peder rann al levr : Bed, Bro, Buhez ha Barzhonegoù berr. C’hwech’h kant pemzek skrid en holl. Ur pezh mell labour bet sevenet en ur ober daou-ugent vloaz. Peadra da dermal a-raok kemer penn an hent...

Ne fell ket da Youenn Kervalan e ve graet « barzhonegoù eus skridoù an teskad-mañ ». « N’int nemet yudadennoù kriadennoù-forzh, galvadennoù da sachañ hoc’h evezh war gened ha vilded ar bed a vevomp ennañ, war bihanded ha meurded Mab-den, anezhañ biliennig ruilhet-diruilhet e naoz froud birvidik ar Vuhez. » Galvadennoù, ya, trivliadennoù, prederiadennoù, enkrezioù,

estlammoù... Daoust hag-eñ ez int barzhonegoù gwir ? Petra ’vern... Lod a zo savet e komzoù plaen, nemet ez int renket e stumm gwerzennoù, lod all a zo skrivet e-giz kanaouennoù, gant dibennoù rimet. Lod a zo berr, lod a zo hir. Lod a zo skañv, lod a zo stambouc’hus... Lusk ha startijenn enno bepred. Ar c’hoant garmañ a zo kreñvoc’h eget ar c’hoant turgnañ fin. Ar stourm a gemer e greñv war an arz, daoust ma ’z eont alies asambles. Roparz Hemon, Per Denez, Paol Keineg, Yann-Ber Piriou, Añjela Duval o deus digoret klas.

Ur seurt deizlevr eo *Kalonya*, bet skrivet a zeiz da zeiz, diwar poanioù ar geizh eus ar bed holl : « evito e vo va Miserere / Divroañ ha mont da glask repu / e baradozhioù enk an harlu ». Eno emañ o zalvoudegezh. Barzhonegoù Youenn Kervalan


a zo aes da lenn, daoust ma plij d'an aozer ober gant gerioù nebeut anavezet a-wechoù. N'eo ket evit kinklañ eo, met gant doujañs ouzh yezh e vro. Barzhonegoù poblek ez int, neuze, en desped d'ur c'heriaoueg puilh. Soñjet em eus alies ouzh o lenn e doareoù ar *slam*, hanter-hent etre ar c'han hag ar gomz.

Diwar ar ger "kalon" eo bet goveliet "Kalonya", moarvat, gant daou ster ar ger-se e brezhoneg : karantez ha kadarn-

ded. Ur gêr na gaver « roud ebet anezhi war kartennoù ar bed », e-giz an Utopia gozh, ul lec'h ma vo degemeret an holl e peoc'h en un endro disaotr. « Tonket eo donedigezh Kalonya » evelkent, gant ma vo youl ha nerzh-kalon ennomp, enep d'ar spered gallgar... N'eo ket gwazhweler Youenn Kervalan. Tec'hout e vefe. Gwell eo gantañ chom e damani ar vuhez. : « Dourañ 'ran / Bleunioù ar Spi / E trion / Ar gasoni ».

MBdB

Hudour burzhudus Oz,
gant Lyman Frank Baum,
brezhoneg gant
Mari Elen Maze,
tresadennoù gant
Steven Maze,
Embannadurioù Aber,
205 pajenn, 12€



Hudour burzhudus Oz (The Wonderful Wizzard of Oz) a zo bet embannet e 1900 er Stadoù-Unanet. Oberenn vrudetañ Lyman Frank Baum eo. Un den liesdonezonet e oa : tresour, kazetenner, saver filmoù, ha skrivagner evit ar vugale.

Dorothy hag he c'hi Toto a zo bet kaset d'ur vro vurhudus

gant ur gorventenn. C'hoant bras he deus Dorothy da adkavout he familh e Kansas. Ret e vo dezhi foetañ bro, kejañ gant sorserezed mat pe zrouk, ober anaoudegezh gant ur spontailh en deus c'hoant da gaout un empenn, gant ur c'hoadour staen en deus c'hoant da gaout ur galon ha gant ul

leon aonik en deus c'hoant da vezañ kalonek. Mont a raint asambles da gavout hudour Oz evit ma vo roet o c'hoant dezho. Met daoust da zDorothy bezañ lazhet ur sorserez drouk diouzh e c'hourc'hemenn, en em ziskouez a ra an hudour gwall zic'halloud. N'eus anezhañ nemet un triakler. Rankout a raio Dorothy diskouez intrudu. Ur plac'hig speredek ha digor he spered eo, gouest da dennañ he spilhenn gant skoazell he mignoned.

Ur romant deskoni plijus eo, gant tudennoù gwall zic'hortoz : un hudour triakler, ur c'hoadour staen, ur spontailh... Un dalvou-degezh arouezel a zo bet lakaet war-wel gant ekonomourien amerikan. Hervezo e vefe levr Lyman Frank Baum ur barabolenn eus ar gevredigezh amerikan e fin an XIX^{vet} kantved, da vare un enkadenn veur (1883-1897). Un tabut ekonomikel a rae e reuz d'ar c'houlz-se a-zivout ar stalon-aour, astennet pe get d'ur stalon aour-hag-arc'hant... Pep tudenn a gemerfe plas tud vrudet pe renkadoù tud en Amerika. Enkorfet e vefe ar renkadoù etre gant Dorothy. Botoù arc'hant a zo bet roet dezhi da vont da weladenniñ

hudour Oz, dre un hent pavezet gant brikennoù alaouret. Sed an tabut etre an daou vetal... Ar spontailh a vefe arouez ar beizanted, hag ar c'hoadour staen arouez ar vicherourien. Ha piv an hudour triakler, ma n'eo ket Marcus Hanna e-unan, marc'h-blein ar republikaned ? Peadra da voueta ar preder un eil gwech, marteze.

MBdB

Ruzoni ar serr-noz,
gant Herri ar Borgn,
Skol-Vreizh,
84 fajenn, 10€




Un dastumad dalif eo *Ruzoni ar serr-noz*, alese ur meni testamant. Ennañ e vo kavet barzhonegoù stourm koulz ha barzhonegoù kimiadiñ. Prederadennoù war ster ar vuhez ha war fin ar vuhez. Ur plas bras zo bet roet d'ar c'hleñved. Feal eo chomet kalon Herri ar Borgn ouzh Breizh betek penn. Ha

fromus eo lod eus e varzhonegoù, daoust dezho bezañ un tammig diamzeret a-wechoù, e-giz ma vijent bet skrivet hag adskrivet meur a wech dija... Santet e vez ez eo leal ha didroidell an aozer avat. Heson eo e werzennoù peuliesañ, ha brav e vefe tennañ kanaouennoù diouto moarvat.

MBdB

**Le génie singulier des
Celts, Une aventure
humaine en Gaule au
I^{er} siècle avant J.-C.,**
gant Anie ha Michel Politzer,
Yoran embanner,
112 pajenn, 16€



N'eo nag al levr kentañ nag an hini diwezhañ skrivet a-zivout ar Gelted. Savet eo en-dro d'un istorig brezel e Galia etre Bituriges ha Pictones er c'hentañ kantved KJK. Un

digarez d'ober troioù gant daou C'halian ha d'ober anaoudegezh gant an dud, o micherioù, o annez, o sevenadur, o relijion, o doareoù da vrezeliñ. Lenn a reer goude diwar-benn alouba-

deg armeoù Kaezar gant an titl « *La guerre en Gaule 100 ans plus tard* » un tamm iskis peogwir e vezer e-kreiz ar c'hentañ kantved KJK... Pevar fennad a gloz al levr : *Quel est l'héritage celte ?*, *Le génie singulier des Celtes*, *Que devons-nous aux Celtes ?* gant ur c'heriaoueg hag *À propos des langues celtiques* gant Evi Bargain.

Ul levr evit ar grennarded eo kentoc'h met gellout a ra bezañ lennet gant tud deut. Kinniget eo brav gant tresadennoù niverus ha plijus ha luc'hskeudennoù kempenn.

Deskiñ a raio traoù ar re n'o deus lennet netra war an danvez.

Direnket on bet gant un nebeud traoù. N'eus kaoz nemet eus Galianed pe dost daoust d'an titl. Reizhet eo an traoù pa zigorer al levr, gwir eo. An div rann « *Le génie singuliers des Celtes* » ha « *Que devons-nous aux Celtes ?* » a seblant un tamm eeunik. N'em eus kavet levr lennadur ebet. Koulskoude pa glasker ober ul labour a boblekadur e kinniger levrioù all d'al lenner peurliesañ zoken mard eo yaouank... Gwelloc'h eo lavarout peseurt mammennoù a vag an oberenn. Ne gaver amañ nemet ul listennad verr a dud ouiziekl trugarekaet...

HL

KELAOUENNOÙ



**Jerom OLIVRY &
Tudual HUON**

mañ gant an arc'hant bet rastellet a-drugarez d'ar c'hilometradoù (ha miloù-mor !) gwerzhet. Un troc'h-kaoz a lenner ivez gant Marine Lavigne, unan eus ar c'hanerezed a zo aet ar maout gante evit kanaouenn Ar Redadeg : *Betek an trec'h*. Loc'hañ a raio Ar Redadeg d'ar Gwener 4 a viz Mae e Kemper hag e erruo e Plougerne d'ar Sadorn 12 a viz Mae.

30 vloaz zo, 20 vloaz zo, 10 vloaz zo... Ar pennadoù dibabet el lodenn *Soñj & disoñj* a ro ur santimant a “bet gwelet c'hoazh”. Testeni un den dalc'het war evezh daou zevezhpada evit bezañ distaget gerioù brezhonek dirak poliserien, ar brezhoneg gwallgaset gant dilennidi ar Stad, pe c'hoazh

> Bremañ (419)

Gouestlet eo teuliad niverenn 419 **Bremañ** d'Ar Redadeg hag a lid e 10 vloaz. Un hir a atersadenn a c'haller lenn gant Bernez Rouz, prezidant *Ti ar Vro Kemper* hag en deus labouret war gouel loc'hañ Ar Redadeg. Hag ur souezhadenn a zo bet fardet gante, dre ma vo redet war zouar ha war vor ar wech-mañ ! Dizoloñ a reer ivez an holl raktresoù a vo sikouret er bloaz-

gwiraourien a-enep da ginnig-lezenn ministrerez ar Justis.

El lodenn *Bremañ er bed* e lenner pennadoù bihan a bep seurt, en o zouez istor ur Breizhad marvet pa oa aet da gemer an armoù e Siria a-enep ar Stad Islamour.

Anavezout ar bed a zo ivez anavezout e ved dezhañ e-unan. Sed aze ma lenner diwar-benn skrid koshañ (dibenn an VIII^{vet} kantved !) gant gerioù henvre-zhonek ennañ bet diskoachet, gant un droidigezh e brezhoneg a-vremañ eus ul lodenn, mar plij ganeoc'h !

Kaoz zo c'hoazh eus yezhoù el lodenn *Broioù & pobloù*. Yezhoù Afrika ar c'hornôg pa lârin mat. Eno e vez kavet kantadoù a yezhoù disheñvel-mik an eil ouzh eben ha ken disheñvel all o stad hervez ar broioù ma 'z int komzet.

Ur pennad-kaoz a lenner er pajennoù *Bremañ e Breizh* gant Nil Caouissin hag en deus kemeret perzh e embannadur nevez an *UDB*. Al levr titlet *S'émanciper, Un projet de société vu de Bretagne* a zispleg deomp « ar rag hag ar perag » eus stourm ar strollad-se.

Abaoe penn diwezhañ an XIX^{vet} kantved n'eus ket eus ar

bleizi ken e Breizh. Ar pennad el lodenn *Bevañ e Breizh* a ginnig deomp mont dreist d'ar mojennoù a zo bet savet dioute evit o anavezout un tamm muioù'h kar... ar bleiz zo deuet en-dro !

Er bajenn *Bevañ e brezhoneg* ez eus kaoz eus ar staj aozet gant *KEAV* ha *Ti ar Vro Kemper* : bevañ ur sizhunvezh e brezhoneg gant ar familh, war Enez-Vaz, ha mont pelloc'h gant implij ar yezh er gêr.

El lodenn *Levrioù, arzoù, embann* ez eus kaoz eus ur filozofour dianav, pe dost, hag eñ ganet e Kintin. Padal e oa bet e skridoù diaz un toullad prederiadennoù eus an XIX^{vet} kantved. Lenn a reer ivez ur pennad diwar-benn al levr *D'ar skol* ! Ma vez kavet ennañ fotoioù a-vil-vern eus skolidi, skolajidi ha liseidi Diwan a-vremañ.

Al lodenn *Sportoù & yec'hed* a ginnig deomp mont da redek e Sant-Maloù pa ne dremenno ket Ar Redadeg dre ar gêr-se. Kerkent ha strivet gant ho treid ho po tro da dreññ ar bajenn ha dizoloiñ ar rekiyeoù lipous da adaptout nerzh !

JO

> Al Lanv (143)



War golo niverenn 143 **Al Lanv** emañ poltred Divi gKervella. Ur c’henavo d’ur mignon a-gozh aet da Anaon e dibenn 2017 a c’heller lenn e penn kentañ ar gelaouenn. Savet eo bet ar pennadoù gant Gireg Konan, Daniel Doujet ha Padrig an Habask.

Aline Gleoneg a bled en he fennad gant ar repuidi Rohingya er Bengladesh. Notennoù eus Iwerzhon a zo bet savet gant Eamon O Ciosain (afer an harzoù etre hanternoz Iwerzhon hag ar peurrest eus ar vro ; gouarnamant lec’hel ebet en hanternoz ar vro ; Stivell e

Dulenn ha priz al lojeiz war gresk en Iwerzhon).

El lodenn etrebroadel ez eus kaoz eus Katalonia gant Padrig an Habask.

Emgavet eo Charlie Grall gant e drede pennad diwar-benn e vignon Martial Ménard. En dro-mañ emañ distro Martial war zouar Breizh ha ne voe ket seizh daleetoc’h evit kregiñ e-barzh ar stourm : *Kentañ geriadur Eflamm ha Riwanon* a voe embannet gant Martial hag e vignoned eus *Diwan*, SAB (*Stourm Ar Brezhoneg*) a voe krouet ha Martial a voe evel-just e-touez an duerien panelloù-hent kentañ.

En e bennad *Dienez ar vugale* e tispleg Paol ar Meur ez eo ar baourentez un efed lignezel. Dav e vije rannañ ar pinvidigezhioù evit cheñch penn d’ar vazh, siwazh gant un hent kontrol emeur o vont hiziv an deiz.

Ur pennad hir ha kentelius a zo bet savet gant Stéphanie Le Pelleter diwar-benn ar magourioù dre soubidigezh e Breizh : « un dachenn dedennus evit an oberoù e-keñver ar brezhoneg ». Displegañ ’ra S. Le Pelleter pegen start e oa bet lakaat ar vagouri *Babigoù Breizh* da vont

en-dro e Gwened da skouer. E 2013 e oa bet krouet ur mikrovagouri e Naoned : *Youn ha Solena*. Ur vagouri a zo bet krouet e kêr Roazhon ivez : *Neizhig*. Bep tro ma klasker sevel ur vagouri nevez e sav kudenn al lec'h a rank bezañ azasaet da ezhommoù seurt aozadur.

Un toullad pajennoù a zo gouestlet da stadegoù an Diplom Barregezh war ar Yezh. Savet eo bet ar pennad gant Cédric Choplin. Abaoe 2012 ez eus bet ouzhpenn 1000 emstriver o tremen an amprouennoù evit kaout un testeniekadur etre A2 ha C1 diouzh skeul Europa ar barregezhioù-yezh. Koshoc'h-koshañ eo an emstriverien ha 65% anezho a zo emstrivered. Sellet pizh zo bet graet ouzh kaelioù-priziañ 136 emstriver evit o dielfennañ ha kompren a raer eo ar fonologiezh ar pep diaesañ evit ar gomzerien nevez ; liv ar galleg a zo war o yezh alies mat.

Eizh levr nevez embannet a zo bet burutellet gant Alan Botrel el lodenn *Keleier an embann*.

Jo Martin en deus lakaet e brezhoneg ur pennad fentus gant Mark Twain : *Pareañ ur sifern*.


War golo-kein ar gelaouenn e c'heller lenn *Barazhoneg*, ur skrid diwar zorn Youenn Kervalan :

*Klevet em eus e-giz un
hiboud
Goude m'eo aet ar baraer
en e roud
Tavet ar skrillh, lazhet ar
forn
Dic'houlou bremañ an ti
korn*

Diwar ar pozioù-mañ e c'heller kompren ar c'hoari-ger a gaver e titl ar varzhoneg. Ur varzhoneg all gant Yulia Borisova a c'heller lenn er gelaouenn ivez : *Kalz bleunioù 'zo...*

TH

> Bro Nevez (145)



E saozneg penn-da-benn eo ar gelc'hgelaouenn-mañ. Gouestlet he deus L. Kuter un dek pajenn bennak d'ur pennad hir hag aozet en un doare splann lec'h ma tispleg d'al lennerien amerikan istor ar brezhoneg ha perak emañ hor yezh en arvar hiziv an deiz.

Evel bep tro ez eus ur pennad e saozneg gant Jean-Pierre Le Mat : *Deep inside a breton skull : memory, intelligence, culture*. Kinnig a ra aozer ar pennad danvez preder war hor sevenadur hag hini ar C'hallaoued. Peseurt diforc'h a zo etreze ? Unan dioute a zo bet stummet, aozet, frammet gant ur

stad kreñv hag hollec'halloudus, gant nerzh ha youl ar bolitikourien a-hed meur a gantved, egile avat n'eo bet goveliet gant Stad ebet ha diaesoc'h a se gouzout gant peseurt hent emañ o vont.

Evel kustum ez eus ur renabl eus ar pladennoù nevez embannet e Breizh.

Dibabet he deus L. Kuter evit dielloù *Bro Nevez* ur pennad bet tennet eus rentañ-kont ur veaj e Breizh e 1889 gant *The Cambrian Archeological Association*. Pell mat zo ez eus darempredoù etre Breizh ha Kembre, eme L. Kuter ha bez' ez eus hiziv an deiz 44 c'hêr paeroniet etreze. *Ti ar Vro Kemper* en doa aozet e-doug miz Meurzh un emgav gant Kembreiz hag a oa deuet da gomz eus an divyezhegezh en o bro.

TH

> Le Peuple Breton (650)



Emañ *UDB* o paouez lakaat embann ul levr war raktresoù ar strollad azasaet d'ar bed arnevez : *S'émanciper - Un projet de société vu de Bretagne*, gant-se ez eus bet gouestlet un toullad pajennoù d'al levr nevez-se (ti embann *Presses Populaires de Bretagne*).

El lodenn vrezhonek en deus Clyde Dlugy Belmont savet ur pennad diwar-benn Macron hag ar yezh(où). Un implij stank a ra Prezidant Bro-Frañs eus ar saozneg (war *Twitter* da skouer) ha kement-se evit kas lavar ar Frañs d'ar bed a-bezh. A-wechoù

ez implij an div yezh saozneg ha galleg met n'eo ket evit lavaret memestra. E galleg e vo kaoz gantañ eus an aferioù diabarzh, ar surentez, ar gwarez sokial... hag evel-just n'eus netra cheñchet gant ar Prezidant-se : yezh ar Republik eo ar galleg. Biken ne fiñvo gouarnamant Frañs evit reiñ da gomzerien yezhoù minorel Frañs an disterañ galloud, eme aozer ar pennad.

50 vloaz zo e oa bet reuz bras e Bro-Frañs da vare Mae 68. Paol ar Meur en deus bet c'hoant distreiñ war ar prantad-se, un asez dispac'h kaset da benn gant tud diwriziennet en o bro, tud yaouank a nac'he asantiñ d'ur galloud na oant ket evit kompren. E-pad ar prantad klemm-se e oa bet klasket gant an dispac'herien ijinañ un dazont nevez.

Kaoz a zo gant Fañch Bihan-Gallic eus ar reuz a zo savet tro-dro da dachenn-emgann Cùil Lodair (Kulloden) pa fell da *Kirkwood Homes* sevel tiez tre kichen ar monumant a zo bet savet e koun ar soudarded jakobit bet lazhet eno e 1746.

A Squadra Corsa digabestr ?
Sed aze titl ar pennad bet skrivet gant Maxime Touzé. Un tour-namant a vo aozet e Fort-de-

France etre Martinika, Guyana, Gwadeloup ha Korsika. Strollad Korsika n'eo ket ofisiel sed ma ne c'hell ket kemer perzh e tournamantoù an Euro. Ur statud ispisial a garfent kaout digant ar *FIFA* evit gallout kemer perzh er c'hrogadoù ofisiel.

War ar bajenn gouestlet d'al lennegezh ez eus bet burutellet tri levr gant Herve Lannuzel : *Afrika* gant Lan Tangi, *Divaskell da nijal kuit* gant Yann-Ber Piriou ha *Ruzoni ar Serr-noz* gant Herri ar Borgn. Un diverrañ eus ar gelaouenn *Al Liamm* niverenn 426 a gaver ivez aozet gant Morgan Tremel.

Ur bern pennadoù all e galleg a dalvez ar boan bezañ lennet ivez : kalvar Kurded Siria, kudennoù Republik Iwerzhon, kreizennet ar galloud a galz re, ha marv ur stourmer breizhat, Kendal Breizh, e Afrin dindan bombez arme Erdogan.

Ur pennad all a-bouez bras ha kentelius-meurbet a zo bet skrivet gant Jean-Jacques Monnier diwar-benn Goulven ha Claudine Mazéas.

> Le Peuple Breton (651)



War golo niverenn 651 **Le peuple breton** emañ poltred Yann-Fañch Kemener hag e-barzh ar gelaouenn ez eus ur pennad-kaoz hir gantañ e galleg war al liammoù etre ar yezh, ar sevenadur hag ar mennozhioù, an treuzkas etre remziadoù. Ur pennad-kaoz all a zo e galleg ivez gant Yann Meur diwar-benn ar film *Kalon Dardoup* hag ar Web-doc diwar-benn an hengoun tro-war-dro d'ar C'hastell-Nevez.

El lodenn vrezhonek ez eus kaoz eus *Ar Redadeg 2018* a vo aozet etre ar 4 hag an 12 a viz Mae. Reiñ a raer deomp keloù

eus ar raktresoù a vo skoazellet gant Ar Redadeg : Gast/Difenn (staj en em zifenn hag atelieroù e brezhoneg ; ar gevredigezh *CPTMKK* (stirad web *C'hwî a gano*) ; *DAO* (brezhoneg dre ar video-BEV) ; *Kreizenn Sevenadurel Vrezhon Gwen-gamp*, evit digeriñ ur greizenn-dudi e brezhoneg ; *Roued* (BEV. bzh, rouedad sokial e brezhoneg) ; *Mignoned ar brezhoneg* (10 vloaz an taol-lañs) ; *Hentoù treuz* (stummadur) ; *ADDES* (abadenn liesliv KANevedenn).

Daoust ha mont a raio al linenn hent-houarn etre Kastell-Briant ha Roazhon da get ? eme Nil Caouissin. N'eo ket bet dalc'het al linenn a-ratre ha digresket eo bet tizh an trenioù, gant-se ez eus nebeutoc'h a dud oc'h implij an tren, memestra ez eus 200 000 beajour ar bloaz.

Abalamour da bozioù ur ganaouenn a-enep Roue Bro-Spagn e vo kaset ar rapper katalan Valtonyc d'an toullbac'h moarvat. Setu ar pezh a zispleg Maxime Touze deomp.

Ur pennad-kaoz a zo ivez en niverenn-mañ gant daou ezel eus *Cymdeithas yr Iaith Gymraeg*, kevredigezh ar c'hembraeg bet krouet e 1962. Displegañ a

reont peseurt stourmoù a zo bet kaset da benn gant ar gevredigezh (*S4C* ar chadenn skinwel e kembraeg, al lezennoù war ar yezh...). Fellout a ra dezho digreizennañ ar galloud ha merañ ar mediaoù, kaout servijoù hollek e kembraeg (gourc'hmarc'hadoù, tiez-bank ha kement zo). El lodenn *Du ha Gwenn ha plas da lenn* en deus Herve Lannuzel burutellet pemp levr (*Du evel an noz liesliv* gant Malo Bouëssel du Bourg ; *Park Balan* gant Riwal Huon ; *Geriadur ar vezekniezh* gant Yann-Baol an Noalleg ; *Pebezh buhez ki* gant Herve Jaouen, brezhoneg gant Herve Lossec ; *Ur vuhez all am boa bet* gant Maguy Kerisit).

TH

Annaig KERVELLA
Tudual HUON

Annaig KERVELLA
Tudual HUON

HOR MIGNONED

Kaňv :

Ul lenner feal d'*Al Liamm* 'oa Denis Coz. Aet eo da Anaon d' ar 5 a viz Meurzh, d'an oad a 78 vloaz, e Pont-'n-Abad, goude ur stourm kalonek ouzh ur c'hleñved hir ha poanuis. Ur brezhoneger a-vihanik 'oa Denez 'C'hozh, ganet e Sant-Yann-Drolimon, er Vro-Vigouden, en ur familh a vrezhonegerien.

Graet gantañ studioù war Skiantoù an Natur e Roazhon en doa kuitaet ar vro da vont da gelenn ha da gemer perzh er c'henobererezh e Bro-Aljeri. Anavezout a rae ar vro dre ma oa bet soudard a-hont e-pad ar brezel. E Azazga, er C'habili, en doa labouret ha bevet e-pad dek vloaz. Pelloc'h e vefe chomet panevet d'ur fazi meles-tradur bennak, kement e kare ar vro-se, ar vugale hag o zud du-hont.

Deuet en-dro da Vreizh e oa bet kelenner e Kastell-Briant, e Kemperle hag e Kemper. Adkavet en doa e dud, e vignoned hag e yezh vamm a oa chomet tost d’e galon. Betek penn en doa

kendalc’het da stourm evit ar brezhoneg ; hep disoñjal ar stourm evit an Natur en arvar, an dud, al loened hag ar plant gouez. Doujañs ha karantez en do bet maget e-keñver ar vuhez, ar boudoù bev e vuhez-pad.

Aet eo kuit Denis, ne vo ket ankounac’haet gant e vignoned. En o c’halon e chomo bev an den a-zoare en deus bet diskouezet dezho un hent a zoujañs.

Hag evel ma lavar ar barzh :

Gwelout ur bed
en ur c’hreunenn traezh
Gwelout ur baradoz
en ur vleunienn ouez
Derc’hel an didermen
e palv an dorn
Hag ar beurbadelezh
en un eurvezh.

Yann Ber Piriou

Ganedigezh :

Laouen-tre omp, Mael Kernallegenn ha Jean-Baptiste Vasnier, o kemenn deoc’h eo ganet hon mab Milio Kernallegenn d’an 31 a viz Genver.

PROFOÙ _____

Miz C’hwevrer : Fañch KERRAIN ; Anton FITAMANT ; Jef GEDEZ ; Jean-Claude ha Marite LE BERRE ; Marcel TEXIER ; Ronan AN HENAFF ; Alain GICQUEL ; Manuel BIANNIC ; Alain PEIGNE ; Tangi LOUARN ; Pierre QUENTEL

— War un dro : 410€

Miz Meurzh : André LE DEROFF ; Yann-Fañch BURLOT ; Michel MANAC’H ; Yves GUILLOU ; Elisabeth LE FEUVRE ; Paul CAULET ; Alan AR GAL ; Jan-Maï ha Maï-Gristin

GWERNHALEG ; Fulup OILLO ; Jean-Paul LEBLAY ; Huguette
GAUDART ; Francis GOHIN ; Yannick LE PORT ; Luc BIDEL
— War un dro : 215€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn
d'hor skoazellerien.*

PRIZIOÙ DAZONT AR BREZHONEG 2018

E Karaez e oa bet lidet 21^{vet} abadenn Ar Prizioù d'ar Gwener 16 a viz C'hwevrer. Klevet e oa bet evit ar wech kentañ strollad nevez Nolwenn Korbell : Nolwenn Korbell's band. Aozet 'oa gant *France 3 Breizh/an abadennoù brezhoneg* hag *Ofis Publik ar Brezhoneg*. Leun mat e oa sal Glenmor gant tost da 350 arvester.

Kevredigezioù

Kentañ priz : *Gwarez Filmoù Breizh*, dastum ha saveteiñ filmoù diwar-benn Breizh. Un implijadez a ra gant ar brezhoneg.

Eil priz : *Yezhoù ha Sevenadur*, a vod meur a framm er memes lec'h e Naoned.

Trede priz : *Youn ha Solena*, ur vagouri e brezhoneg dre soubidigezh, e Naoned.

Strollegezhioù foran

Kentañ priz : Sindikad kemmesk Park naturel Arvorig, panellerezh divyezhek dreist-holl e Menez Meur.

Eil priz : Kêr ar Roc'h-Derrien, un arload teiryezhek diwar-benn istor ha glad ar gumun.

Trede priz : Mirdi ragistor Karnag, fichennoù pedagogel e brezhoneg.

Embregerezhioù

Kentañ priz : *Rugby Club Gwened*, testennoù, luganoù, skritelloù e brezhoneg hag implij ar yezh war an dachenn.

Eil priz : *Mar 'Mousse*, Tudwal ha Mathias Girard o deus savet ur c'hav bier divyezhek penn-da-benn e Plerin.

Trede priz : *Sistr Plougastell*, Kristof Konan a ra tiketennoù divyezhek evit e voutailhoù evit lakaat brezhoneg war-wel.

Levrioù faltazi

Kentañ priz : *Divaskell da nijal kuit*, dastumad barzhonegoù gant Yann-Ber Piriou (emb. *Skol Vreizh*).

Eil priz : *Pellik*, barzhonegoù gant Anthony Heulin (emb. *Mouladurioù Hor Yezh*).

Trede priz : *Troiad en Ifern*, romant gant Mich Beyer (emb. *An Alarc'h*).

Kleweled

Kentañ priz : *Fin ar Bed*, ur stirad faltazi sevenet gant Nicolas Leborgne (*Lyo production* ha *Tita productions*).

Eil priz : *Open the Border*, teulfilm gant Mikael Baudu (*Gwengolo Filmoù*).

Trede priz : *Ar mor atav*, film faltazi gant Emmanuel Roy (*Kalanna Production*).

Pladennoù kanet e brezhoneg :

Kentañ priz : *N'om gustumiñ deus an deñvalijenn* gant Kris-menn (*World Village/Pias*).

Eil priz : *Loened Fur ha Foll* gant Morwenn Le Normand ha Roland Conq (*Coop Breizh*).

Trede priz : *As an end to death* gant Tiny Feet (*Les disques Normal*).

Brezhoneger(ez) ar bloaz :

Kentañ priz : Stephanie Stoll, prezidantez Diwan, ur stourm dizehan ha war veur a dalbenn evit kaout diskoulmoù war hir dermen.

Eil priz : Maripol Gouret ha Jean-François Guillouzic, o labour divent evit sevel kreizenn *Yezhoù ha Sevenadur* e Naoned hag al

levraoueg vrasañ gouestlet da Vreizh ha d'ar brezhoneg, el Liger-Atlantel.

Trede priz : Fañch Bernard, stourm familh ar paotrig evit ma vefe skrivet mat e anv gant un « ñ ».

KEMENNADENN A-BERZH DIWAN

Nec'het eo Diwan gant disoc'hoù ur raktres lezenn a vo studiet gant ar gannaded er Gambr d'an 28 a viz Meurzh. Al lezenn-mañ, kinniget gant Françoise Gatel, senedourez Il-ha-Gwilen ha harpet gant ar gouarnamant, a zo he fal « eeunaat hag emframmañ gwelloc'h » digoradur hag eveshaat ar skolioù prevez ha n'int ket kevratet. Se zo ul lodenn eus gwikefre ar gouarnanant evit diwall diouzh ar mennozhioù radikal.

Daoust ma n'eo ket a-enep ar skolioù Diwan hag a zo laik, digoust hag a ra gant programmoù an Deskadurezh Stad e viro al lezenn-mañ ouzh hor skolioù a greskiñ hag a dreuzkas “ar yezhoù rannvro” a zo « ul lodenn eus glad Frañs » hervez Bonreizh 1958. Ur skoilh nevez all eo an destenn-mañ tra ma n'eo ket bet diskoulmet c'hoazh diviz nullañ ar c'hevratoù skoazellet hag a zo ur gudenn vras evit ar rouedad.

Bep bloaz e vez digoret skolioù nevez gant Diwan. Ret eo da zDiwan digeriñ skolioù hep kevrat ha gortoz 2 vloaz a-raok gellout goulenn digant Rektordi Naoned ha Roazhon, lakaat dindan gevrat ar skolioù (hervez ar c'henemglev sinet e miz Kerzu 2014). Evit ar poent, n'eo ket bet meneget en destenn goulenn rouedad Diwan bezañ kevratet. Galvet en deus Diwan kannaded Breizh evit ma 'z int a-du gant ar c'hemmoù savet gant Yannick Kerlogot, Paul Molac, Erwan Balanant, Annaïg Le Meur, Gwendal Rouillad, Herve Pellois, Yves Daniel ha François André. Ur diskoulm 'vefe ar c'hemmoù-mañ evit mont en-dro ar skolioù hag a rank chom ur mare digevrat a-raok bezañ kevratet.

E miz Gwengolo 2017 e oa 4 318 skoliad e Diwan ha digoret 'oa bet ur skol e Plougastell-Daoulaz. Un nebeud raktresoù zo war ober :

5 raktres skol (Ploermael, Su Goueloù, Kemper, Landreger, Plougerne)

1 raktres skolaj (Il-ha-Gwilen) hag 1 raktres adskolaj (Bro-Dreger)

1 raktres lise (Bro-Gwened).

LENNADENN. BZH

Ur pennadig zo e oa bet krouet gant Paskal an Intañv ul lec'hienn ma c'heller prenañ (marc'had-mat alies a-walc'h !) enrolladennoù skridoù brudet. Lod istorioù a zo bet savet gant Fañch an Uhel ha tennet eus *Kontadennoù ar bobl* embannet gant *Al Liamm*, da skouer : *Paotr e bod-houarn*, *Gwenveur ha C'hwevrer*, *Ar roue Dalmar*. Danevelloù a zo ivez evel *Erôs hag an Ankou* bet skrivet gant Fañch Elies-Abeozen hag embannet e-barzh *Galv* e 1941 hag ivez *Pellgent Loc'h Laoual* bet skrivet gant Youenn Drezen e 1929 hag embannet er gelaouenn *Al Liamm* e 1965. Selaou a c'heller ivez *Enez an teñzor*, romant Stevenson bet lakaet e brezhoneg gant Yeun ar Gow hag embannet gant *Al Liamm* ivez. Ur skoazell a-bouez evit ar re a zo o teskiñ hag o peurzeskiñ ar yezh.

AN BRONNTAS / AR PROF

Abaoe kreiz miz Meurzh e c'heller sellet ouzh ur stirad iwerzhonat a-zoare : *Ar prof*.

A-dal al lodenn gentañ : *Distro ar mab foran* ez eus nerzh ha startijenn gant an istor. Distro eo JJ da Iwerzhon da geñver obidoù e dad. Emañ labouradeg pesked an tad war-nes ober freuz-stal. JJ a rank ober war-dro al labouradeg bremañ ha skarzhañ un darn eus ar

vicherourien. E vreur henañ n'eus ket da fiziout warnañ. Saveterien war vor int hag e-kreiz ur gorventenn en em gavont gant ur vag war var da ouelediñ hag ar pezh a vo kavet ganto war vourzh a cheñcho red o buhez.

Gellet a reer sellet ouzh ar stirad war *Brezhoweb* ha war ar chadennoù lec'hel-mañ : *Tébéo*, *TVR* ha *Tébésud*.

DIELLOÙ LANGLEIZ _____

Tiegezh Langleiz en deus kemeret an diviz fiziout dielloù Xavier de Langlais e *Levraoueg ar Maezioù Frank* e Roazhon. D'ar Gwener 30 a viz Meurzh e oa bet sinet an emglev. Bez' e oa eno Gaétan ha Tugdual de Langlais hag izili eus o ziegezh, an aotrou Hervé Letort eilprezidant Meurgêr Roazhon e-karg eus ar sevenadur ; e anv al levraoueg e oa ar renerez an itron Bedel hag an itron Toulouse. Tud a oa bet pedet d'ar sinadur ofisiel. Izili eus *KEAV* hag *Al Liamm* a oa eno. Klevet hon eus mibien Langleiz hag unan eus e vugale-vihan o tisplegañ piv e oa keñver den hag arzour. Lec'hiennoù a zo bremañ war ar rouedad gouestlet da Langleiz : www.delanglais.fr ha xl.macolcollectionartiste.com.

Kement hini en defe anaoudegezh eus tra pe dra diwar dorn an arzour a c'hell mont e darempred en ur vont war al lec'hiennoù evit klokaat roll oberoù Langleiz.

GOUEL AR MEIZIANTOÙ FRANK E LANNUON _____

D'ar Sul 25 a viz Meurzh e oa bet aozet un devezh gouel e Sal an Ursulinezed e Lannuon gant standoù a bep seurt, holl anezho oc'h ober hag o plediñ gant meiziantoù frank. Meur a stand a oa dalc'het gant brezhonegerien yaouank : an *Drouizig*, *Openstreet-map*... Da leure goude merenn en doa an *Drouizig* displeget e

brezhoneg hag e galleg petra 'oa e bal hag e oberiantiz war leurenn ar sal, digor ha digoust d'an holl.

En derc'hent e oa bet un abadenn e Gwengamp, e Ti ar Vro, lec'h ma c'helle ar vrezhonegerien mont da selaou displegadennoù izili an *Drouizig* ha da c'houlenn skoazell evit staliañ meiziantoù frank e brezhoneg.

GALNYS PE PRIZ AR GWAD _____

Setu titl pezh-c'hoari nevez ar strollad Tro-Didro. Savet eo bet gant Yann Fulub Dupuy hag embannet an destenn gant *An Alarc'h*. C'hoariet eo bet evit ar wech kentañ d'ar 24 a viz Meurzh e sal c'hoariva kozh Kemper, leun ar sal. Estreget c'hoarierien a gaver war al leurenn, kanerien a zo ivez o kanañ hag o kemer perzh er jeu. An istor berr-ha-berr : istor daou glann er Grennamzer goshañ bet brezel etrezo. Ur gwaz a lignez uhel a zo bet drouklazhet gant ur vaouez eus ar c'hlan enep. An doare nemetañ da gomezañ an traoù eo ar *galnys*, priz ar gwad, da lâret eo kavout un emglev war ar sammad arc'hant a vo roet da zigoll familh an den lazhet.

C'hoariet e vo er Gelveneg d'an 29 a viz Ebrel e sal ar Malamok.

Un droiad a vo aozet e 2018-2019.

SINADEG EUROPAT EVIT AR YEZHOU BIHAN _____

Europa a zo prest da adwelet lezennoù e-keñver ar yezhoù minorelaet/minorezel. Dre rouedad e veze goulennet digant an dud sinañ evit mont a-du gant se. Tizhet eo bet ouzhpenn 1 milion a sinadurioù gant broioù Europa. N'eo ket dreistordinal an niver a sinadurioù bet dastumet e Frañs : etre 9 200 ha 9 300. Pet e Breizh ? *Skol Uhel ar Vro* a embanno ar sifroù moarvat.

KARTENNOÙ EVIT AR VREZHONEGERIEN _____

Milanavezet eo *Google Map*. Unan all digoust ha frank a zo : *OpenStreetMap* (OSM). Hag e brezhoneg emit-hu ? Tud a volontez vat o deus savet *openstreetmap.bzh*. Ar pal ? Lakaat kartennoù, lec'hanvioù hag anvioù poentoù heverk war OSM. Hiziv an deiz e kaver 31 000 anv ha termen war dachenn ar c'hartenniñ war al lec'hienn e brezhoneg. Ul labour war ober eo. Kembreiz hag Iwerzhoniz a ra kemend-all. Kement hini dedennet a c'hell kemer perzh.

MEURZH MIZ AN HAIKU IVEZ _____

Gant *Féa* e vez aozet *Haiskrivmeurzh*. Broudañ ar vrezhonegerien da skrivañ haiku e brezhoneg eo : bemdez e vez roet ur ger, da bep hini d'e implij en un haiku bennak. Gant *Facebook* e c'heller kas e haiku pe neuze war-eeun d'an aozerez Fanny Chauffin. Ar bloaz-mañ ez eus bet 11 den o kemer perzh, 31 ger a oa bet kinniget. En holl ez eus bet 244 haiku. Un dra gaer hag aes digor d'an holl bras ha bihan.

Warlene e oa bet un tañva eus haiku Meurzh 2017 gant niverenn hañv *Al Liamm* (niv. 423) gouestlet d'ar barzhonegoù berr-berr-mañ o tont eus Japan.